

Evel-se ne weler archer,
Fuzilher na kanolier
N'o defe stag gad eur jadenn
Out o abijou eur spilhenn;
Hag eun arme a gant mil den
A houlen kant mil spilhen.

An nadoz a zo demezell
Ganet a lignez uhel;
C'hoant ~~he~~-defe da lavared
Ez e kar-tost da Bourbonnet,
Ha gouskoude e rank goulenn
Sikour out beg eur spilhenn.

Al labourer, ar pinvidig,
An artizan reuzeudig,
Ar general er hombajou,
Ar roue e-penn e stadou,
E pep afer e klask pep den
Tenna begig e spilhenn.

Eur halvez a raio eur harr,
Eur hilhorou, eun alar;
Mez evid ober eur spilhenn
Ez eo kaoud tri zen;
Meur a hini a zreb bara
Ne ouzont ket an dra-ma.

Unan a dailh hed ar spilhenn,
He eeun hag he hennenn;
Gad neud l'êton en-dro d'he fenn
Eun all a ra eur gurunenn;
Eun all out eur mên-higolenn
A lemm begig ar spilhenn.

Evel-se en em zivuzen
O rima war eur spilhenn;
Beg he-deus, gwir e, va spilhenn,
Mez n'e biko den birviken.
Vive eta evid biken,
Vive begig va spilhenn!
